

TU-GIN AN NENVO

Perag, eme eur bugel,
Na welan ket en Ne,
O ninjal a-denn-askel
Eledigo Doue ?

D'he mab e respont timad
Ar vamm, 'n eur vousec'hoarzin :
— « Ar pezh a wel da lagad
N'eo ken 'met *an tu-gin*. »

— « N'eo ken ? N'eo ken ? emehan.
Neuz, mammik karet,
O na kaer e tle bean
An tu-mad da welet ! »

Gant an noz pa oe gwisket
D'an oabl he ventel zu,
War-n-hi tacho alaouret
A luc'has a bep tu.

Ar bugel, he zaoulagad
Wardu an Ne zavet,
A lar neuze : « *An tu-mad*
Em euz c'hoant da welet ! »

He bedennik, hep dale,
A bignas d'an Nenvo :
Ne oa ket tarzet an de,
Pa oe kavet maro...

Euz he gorf oa distaget
Didrouzik he ine :
Ninjet e oa da welet
An tu-mad euz an Ne.

Kreuz ar Vretoned
S. Brice (1897)